

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs round

Me glev ar raned o kanañ

Me glev ar raned o kanañ
Da lavaret erru an hañv
O mabida lann di beda o mabi delaissé

Da lavaret erru an hañv
Da leurioù nevez da blaenañ

D'an dud yaouank da fortunañ
An dud yaouank pa zimezont

Ne ouzont ket peseurt 'reont
Feurmiñ ur jardin a dlefent

Ha plantañ enni tri seurt plant [ennañ]
Poan, chagrin ha tourmant

Va dous amie ha me en-em gav
Ha kalz a dud a oar

Nemed an nebutan mar gellan
Dirak an dud e tiskouezan

Gwelloc'h karantez leiz an dourn
Eget an aour e leiz ar forn

Rag an aour a vez rannet
Hag ar garantez ne vez ket.